



Piv 'oa ganeomp ?

An holl eus an hentenn divyezhek : ar re 6ved, ar re 5ved hag ar re 3de. Tri skolaj oa er sinema : skolaj Jacques Prévert, skolaj Tanguy Prigent e Sant-Martin ha skolaj ar Pevar Avel e Lanneur. Met ivez Aotrou Cadou, Aotrou Velly hag Aotrou Rault. Soazig Daniellou, ar sevenourez hag an aktourien Klaris Lavanant ha Yann-Edern Jourdan zo deuet goude skignadenn ar film.

Nawenn Thomas, Eloïse Glémée, Milan Cabioch, Sacha Not, Thiméo Langlade, 6ved B



Kinnig sinema Ar Salamandre

An hent betek ar sinema oa mat peogwir oa plijus an aergelc'h. E Montroulez emañ ar sinema, e-kichen ar porzh. Sinema La Salamandre eo. War mogerioù ar sal ez eus tresadennoù morgaz. Stumm bourc'h ur vag eo ar salioù. Brav-kenañ eo.

Nawenn Thomas, Eloïse Glémée, Milan Cabioch, Sacha Not, Thiméo Langlade, 6ved B

Bet omp bet e sinema Ar Salamandre e Montroulez gant tri c'harr-boutin bihan, 8 plas pep hini. Teir sal zo : an hini c'hlas eo an hini vihanañ, an hini wer eo an hini vrasañ hag an hini ruz, etre daou. Er sal ruz e oamp. Ar sal sinema a lak ac'hanomp da soñjal e bourc'h ur vag hag en diavaez eo en aluminium. Plijus-kenañ oa an abadenn ha moutig-kenañ ar sal c'hlas.

Nael Nicard, Arthur Messmeur 5ved C

Diverrañ ar film


Istor Mael eo, ur paotr 15 vloaz o vevañ e Brest gant e vamm Liza, e dad hag e vreur bihan. E-barzh ar gevredigezh No Border. Ar gevredigezh a stourm evit degemer ar repuidi. Kevin, mignon kozh Liza zo animatour sokial ha Mael a anavez anezhañ poegiwr eo deuet d'ar skolaj. Gwelet en deus anezhañ ivez e-barzh ur video a ziskouez stourm No Border. Krenardiezh Mael zo diaes ha feuls. N'en deus ket c'hoant chom er skolaj hag en deus c'hoant labourat gant e dad-kozh evel menuzer. Lomig, breur Liza, zo marvet en ur gwalldaol e-kichen ur stal esañs. Kevin ha Lomig o doa c'hoant en em venjiñ ouzh al lanv du erreuet gant an Erika. Mael a ra anaoudegezh gant ar re yaouank eus ar c'harter lec'h m'emañ Kevin o labourat. Youna, ur vignonez da vMael a brest he skooter evit kuitaat e di un deiz bennak. Er fin e weler gouel Sant-Yann. Kontant eo tout an dud.

Yael Daridon, Valentin Moucholi, Leo Not, Nils Jürgens. 3de B/C.

Kinnig an aktourien bennañ



Klaris Lavanant : Rol Liza. Mamm Mael ha breur Lomig eo. Lomig zo marv en ur gwalldaol. Kelenner ez eo. Ober a ra war-dro ur gevredigezh evit ar repuidi, No Border. Bihan eo, blev hir ha pikoù panez he deus. Skuizh eo ha n'he deus ket c'hoant ober gant hec'h amzer dremenet.



Judikael Tual : Rol Mael. Ur skolajiad eo er film, e 3de klas. Bras ha treut eo, pikoù panez en deus. E-kreiz un enkadenn grenardiezh emañ. C'hoant en deus stourm a-enep ar gevredigezh.



Yann-Eder Jourdan : Rol Kevin. Stourm a ra ivez evit ar strollad No Border. Pa oa yaouank e oa bet toullbac'het. Bras eo, ur penn merket en deus hag eo koul. C'hoant en deus ober gant e amzer dremenet.

Roman Cabioch, Titouan Le Gall, Jules Cahaignon, Mael Briand. 3de B/C

Kinnig an aktourien a eil renk

Sarah Bridel : Rol Youna. Ur vignonez da vMael eo. Blev hir ha melen he deus, daoulagad maroñs. Jentil, moutig ha farsus eo.

Loig Jade : Rol tad-kozh Mael. Blev berr ha griz en deus. Bras ha treut eo. Sikour a ra Mael evit e staj munuzerezh. Ur paotr gant alioù fur eo.

Seydina Diouf : Rol Nassim eo. Krennard eo, un tammig dirollet eo ha mignon Mael. Metis ha bras eo. Kavout a ra eo ar brezhoneg evit ar re gozh.

Thomas Cloarec : Rol tad Mael. Ur vouezh dous en deus. Ankeniet eo gant e vab. Bras ha tev eo ha blev du.

Lizig Audren De Kerdrel, Lilwenn Boutte. 5ved C

Lec'hioù filmañ

Filmet eo bet ar film e Brest, e skolaj Diwan Ar Relek-Kerhuon lec'h ma vez komzet brezhoneg gant ar skolajidi, en ur stal-esañs lec'h m'eo tremenet ar gwalldaol en deus lazhet Lomig, breur Liza. Munuzerezh tad-kozh Mael zo brav gant kalz koad. Lec'h staj Mael eo ivez. Al lec'h filmet e Plougastel-Daoulaz zo brav peogwir ez eus un tan bras ha tout an dud zo amañ.



Walina Mauxion, Camille Godfroy-Babin, Corentin Quillivéré

Eskemmoù goude ar film

Eskemmet hon eus goude ar film gant Soazig Daniellou, ar sevenourez, Klaris Lavanant, kanerez hag unan eus an aktourien bennañ, Yann-Edern Jourdan, aktour c'hoariva hag unan eus an aktourien bennañ.

Komzet hon eus ganto ha savet hon eus, da skouer, ar goulennoù-se dezho :

- Pet bloavezh ho peus ezhomm evit sevel ar film ?

« 5 bloavezh hon eus kemeret evit sevel ar film. »

- A-du oc'h Yann-Edern evit dizalc'houriezh Breizh ?

« Ya, a-du on. »

- Perak oa galleg ha brezhoneg e-barzh ar film ?

« Peogwir ne gomz ket an holl brezhoneg e Breizh. » Soazig Daniellou he doa c'hoant klotaat ouzh ar wirionez.

Maelenn Simon-Fablet, Nino Le Gall, Luc Brenner, Léontine Legrand-Moreau. 5ved C/D



Fotoioù all a-dreñv !



